

Ar blei ag al laer.

Mar plich ganech e silleofet ag e klefet kanan
 Eur chanson ag eun disput kompozet ar bla man
 Zo groet da daou adversour o hantren bars er c'hoad
 Arretet da diskouiza en difin o marc'had.

Chellaget ag e kleofet piou vo deus ane
 ken ma kanin ma chanson me a c'halvo ane
 Guillarm ar blei a lerer deus a hunan a ne
 Al laer pe an domajer a rer deus eguille.
 - al laer.

Pera emean klaskes aman da c'houlz man deus an noz
 Pa kle pob den a peb loën bea en e repos
 Spouronnet e teus anon e wolet ta danvad
 Me chonje din voa arri an diaoul dam c'herchat.
 Ar blei.

A te goel aze patant innocent mihiet
 Pa man aze en es kichen pera n'deus ta spontet
 ar mar gout te bed spontet e volet ma danvad
 me zo bed(1) estonnet o kompren es pakad.

Al laer.

Goeloc'h a ve dide Gouillo, deufes ked dam dezoblijan
 me meus eun tam koad aman a mar en dispakan
 ma a rei dide bale pe me a zo tromplet
 a partian gant ta loen pa teus an attrapet.

ar blei.

me meus bed peder gar evid en eum diffen
 a c'hoas pa vin me foulet me diskoelo ouspen
 me dispako ma rastel a ma di grog anout
 me rei din(2) n'eum trankiliza a monet gant ta rout.

al laer.

holla, arretom breman a chenchomp a langac'h
 Pa c'homb daou pot subtil o dibab an partach
 e lec'h dond da neum kanan beomp kamarado
 trugarekeomp doue pa e bed mad om stro

ar blei.

me meus bed poan a fatig o dond petek aman
 a dreuz ar c'horjo, ar c'hoajo ar c'h(l)eunio huelan
 a pa mo groet dal loen man dibrena e chupen
 me rei eur pred essellant gantan kig ag eskern.

al laer.

Te na nout ked difficil te deb ar c'hig an kri
a me ken wid kaat bara a renko vandaji
Ar pezh a meus komeret diwar goust ma nessa
a ma brassa kamarad a el ma zrahissa.

ar blei.

Gani me ma unan voa ie kemen se
eun nosfezh dreist an nojo all a voan ed d'ar chasse :
Pa m(o)a attrapet ma loën a rentet bars ar c'hoad
me woa pillet a prinvet ewid ma zrukarekad.

al laer.

Kement se ma fot Guillou ne voa ked padet pell
Goude e spoa liberte a dare da delchell
a me mar bijen tapet a veo prizonniet
ewid eur pemp pe eur c'herc'h (3) bloa eb bea espergnet.

ar blei.

Sillao a me laro dide kent ewid an disparti
Se de aman eun avis komeri diganin
Chench a etat a klevez a komer eun all hoël
An onestis eo ar goela ewit gaet peoc'h da vewa.

Pa voant e kreiz o disput a zo bed tremenet
eur gendarm a biou de ag an eus o spontet
e armo a lugerne ag all loar a voa skler
ag a ras da pepini partia en e affer.

(1) *Peut-être faut-il lire : ked ?*

(2) *Ms : din ; lire : did.*

(3) *Ms : c'herc'h ; lire c'hoec'h.*